



CHORALE L'ACANTHE



Koukoug

Berceuse du bas vannetais

Koukoug, seizheur eo
Kafe dous da Fañchig tev
Ma 'z aio d'ar skol diouzhtu
Da sunañ liv du.

Koukoug, mintin-mañ
Kae da gas ar saout d'ar prad
Marjanig zo war-sav,
Bet ouzh e goro.

Koukoug, deuet an hañv
D'al labousig da ganañ
D'ober e neizher wezenn,
Pe war an drezenn.

Koukoug, deuet miz Mae
Kit 'ta paotred da vale
Dre ar park, ar wenojenn
Didog, diarc'hen.

Koukoug, miz Even
Kae 'ta Yann da droc'hañ foenn,
Da c'hwennat ar parkeier
Leun a louzeier.

Koukoug, miz Gouere
Echuskol d'ar vugale
Bremañ 'vat 'c'hellont c'hoari
'pad daou viz pe dri.

Koukoug, Chomomp peoc'h
A-walc'h em eus kanet deoc'h

Mont a ran da ziskuizhañ
Kenavo d'ar c'hentañ